

HC_0018_ Ur vestrez koant 'm'eus en Logivi

*O nann nann nann n'in ket ken da foarioù Bihan da Werleskin
O geo geo geo, me aio c'hoazh da Werleskin da foarioù bras*

Ur vestrez koant 'm'eus en Logivi
Tri ler hanter zo 'c'han d'he zi

Ar glav hag avel hag a oa yin
N'en deus petra ne ouie den

Pa oan sevel da goad an noz
Me 'gonto troioù hanter noz

Na pa glevfomp taolioù an deiz
Me 'ay gwele ma c'harantez

Tri votoù koad me m'eus uzet
'vit dont da welet ma mestrez

Pa oan erru 'ba toull he dor
o biken gredin ne c'houll digor

Mes kred ho daol mes koustadig
Ha divunet ma mestrezig

Piv zo aze d'ar c'houlz-mañ noz
O toull ma dor oc'h ober trouz

Ho servijer ma permetet
Digor an nor a rafet

Digor an nor d'ar c'houlz-mañ noz
Digant ma zad me 'glevo trouz

Kit d'ar marchocher da gousket
Da wel't Fransoa paotr ar c'hezeg

A-benn arc'hoaz pa zeu an deiz
Me 'ficho dit da zijuni

Me 'gaso dit
Me 'rei dit-te soubenn dre laezh
Hag a rae vat ha kalon gaezh

*O nann nann nann n'in ket ken da foarioù Bihan da Werleskin
O geo geo geo, me aio c'hoazh da bardon Plouye d'ober ma baotr fin*